

Güerz
 Var an horruubl brén. Douar êruet en Coloni
 ar Martinic, d'ar Güener, 11 demeus a vis
 Güienveur 1839, da 6 heur eus ar mintin.

(194, suite)

Var ton Güerz an Autrou Homo.

Me ho suppli, christènienn, da dostât da glêvet
 Recita maleuriou bras pell ouzomp êruet;
 Mes gent dont d'o explica, e rendfen, me grete,
 Dont aroc da lavarant eur gomz vor ar vrô-ze.

N'ouy get ha c'houi c'heus clêvet comz eus ar Martinic,
 Euy enezen ar gaera demeus an Ameriq.
 Bea e deus c'hoerpec lêo en he brassa kirder,
 Ha pa rêr an dro dêzi daou - uquent a gaver.

(195)

Daou - c'hant pèvar bloas zo just ec'h apparchant d'ar Franç,
 Hac e talc'her anezi, dre c'kraf ar Brovidanç.
 Carguet eo a goajeyer hac eus a Veneziou,
 Eus a rivierou nombrus hac eus a draoniennou.

Ar vrô-ze a brodu calz a zuer hac a gafe,
 A louzaou hac a froueziou coulz ha re hor c'hontre;
 Mes feb tra, kerve 'r c'hlimat, zo gant Doue placet:
 Ne zivoan get er vrô-ze na güinien nac hed.

Hon tud côs a glêvas comz bars en amzer goechal
 Eus a zistruch qær Lisbon, capital Portugal,
 Pehini voe confrontet ebars en euy instant,
 Ebars er bloa mil seiz cant ha pemp hac anter - cant.

Hac er bloavez mil seiz cant tri ha pèvar - uquent,
 Memes maleur a êru evel a voa bet gent:
 Qær Messin, en Itali, rouantelez Naples,
 A voe ive distrujet ha carguet a encres.

Aboue ne voe clêvet, a drugare Doue,

(196)

Comz demeus a Grien-Douar evel eus an daou-ze ;
 Mes deut da zelaou bremañ ar pezh zo êruet,
 Hac e credañ e vezot coulz ha m'en glac'haret.

Jesus, Salver adorabl, prosternet d'an daoulin,
 Ec'h imploran assistanç ho Majesté divin
 D'ellout dont da zisclêria d'am breudeur Bretonet
 Ar maleur an horrupla a neve c'hoarvezet

O enezen Martiniq ! na te zo maleirus !
 Fremi a ran o sonjal en da stat horrerus...
 An hirvoud, an disper, ar yud hac an arrach
 A c'heus eta, ô brô paour ! hirio evit partach !

An unnez a vis quievreur, da bemp heur ar mintin,
 An oll voa cousquet tranqil, hep sonjal nep chagrin,
 Mes gent ma sonas c'hoec'h heur, e voet oll difunet
 Gant straclou an horrupla a ouffet da glêvet.

An tiez a vrancelle evel batimantchou
 Pa ve fourgasset ar môr dre nerz an tempestou ;
 An oll dud, bras ha bian, coulz evel al loened
 A zo qement spouronet, n'ouzont pelec'h monet.

(197)

Darn voa ne grede bouja neuze deus o goele,
 Darn all a zaille ermès, o clasq tec'hel neuze.
 Mes pa essent sortial, e carent oll serret ;
 Lod achap dre digorion ar vuraillou fraillet.

Anfin, forcet da dec'hel, e saillont bars er ru ;
 Mes, ô Doue ! ne velont endro dê a bep tu
 Nemet tiez o coea gant an trous horrupla :
 Ar spouron a ra d'an oll coea demeus o za.

Deuet enne o-unan, savet var an diouar,
 Petra 'velont, va Doue !... digor eo an douar !...
 Fraillet oll endro dêze, neus nemet abimou :
 Ne velont eus a bep tu nemet an isfontou.

Euz hospital construct aboe nebeut amzer,
 G'réz da receo tri-c'hant den eus a dud clân ar quater,

208

A zo en em digoret, coet ractal neuze,
Hep na eus chommet nep men an eil var equile.

Eus a dri-ugent den clân a voa en hospital,
Daou-ugent zo bet lazhet qerqent eno ractal.
Caer eus bet éssat o c'hlasq gant hast hep nep esperm,
Brizillonet e voent oll eno qig hac esperm.

Eun drous eus an horrupla a glêvjot prest neuze;
Ar bobl, carguet a spouren, a rede, a grie:
« Pelec'h e m'ân va zad paour? pelec'h m'ân va mam quèz?...
» O va Doue, possibl ve vent collet da james!... » (198)

An aveliou direol a zo dichadennet,
Ar menezjou huella a zo oll brancellet;
Ar môr a zo furoret, an horrol zo dre oll;
Ar spouroy a zalc'h peb den, ar vro ya d'en em goll...

Darn a c'halve o breudeur, darn all o c'hoarezet,
Re all voa o friejou, re all o mignonet;
Nombr a grie: Va Doue! ô va bugaligou!
Marteze e zoc'h lonqet en fonç an abimou!!...

Ne ouffet qet niveri an dud a zo lazhet,
Nac qennebeut ellout gout ped den zo bet blesset:
Ar guêr eus a Bors-Royal ha Cas. Pilot ive
A zo carzi distrujet dre ar C'hrên-Douar-ze.

Oh! Christénien! pa zônjer er seurt destruction,
N'eller qet en em viret na voadfe peb calon.
Guelit penos an tiez a goez a bep costé,
Hac a ecras dindanne qement zo endro dê!

Ne veler var ar ruujou nemet corfou maro,
O mempron dibastellet ha stringet tro vardro;
Graquez, qoaset, bugale en eur stat hornemus,
Oll ez int lazhet eno, an dud qez maleürus! (199)

Ar re a glasqe t'ec'hel, zo qerqent devoret
Ebors fonç an abimou an douar digoret;
Beo-buec int entret eno en eun instant,

O Doue ! ha biscoas voe eur hevelep tourmant !

Pebes dizurz, va Doue ! pebes calamite
A laca ar C'hren. Douar er vrô maleürus-se !
Ne zeus get da achappi ; ret eo mervel eno.
Dre oll e m'ân ar spouron, dre oll m'ân ar maro !

O pobl meurhet maleürus ! implorit eur Doue ;
An douar fraillet dre oll n'offr d'ê'h nemet eur be :
Oll drapoyou ar maro a velan displequet ;
C'ôs ha yaouanc a zônj dê eo êru fin ar bed.

Eur bobl immanç, treantët gant glac'har ha spouron,
En em strine var an daoulin da implori pardon
Digant hor Zalver divin, rac sônjâl sur a ra
Bea lounget en douar, eo o heur divea.

(200) Ar verc'hic paour a rede da boqat d'he mam quèz,
An ozac'h hac e bried zo lazet assambles.
Ar mab a glasq rêi sicour d'e dad qèz ancien,
A zo qerqent ecrazet eno var an dachen.

O Majestè adorabl ! m'ho ped da gaout true
Demeus ar gristenien baour zo chommet en bue :
Ho pignale int ive, coulz ha ni, va Jesus !
Mizericord evite en o stat maleürus.

Lavaromp peb a Vater, peb a De profundis
Vit qement o deus souffret eno eur maro cris :
Graç dê oll en general da vea recevet
Entre divrac'h eur Doue, en palet an Drindet.

Mes bremân eo ret sônjâl en dud zo achappet
Demeus a eur seurt carnach, goude oll divoeret.
Hor breudeur paour int ive, christenien coulz ha ni ;
Rac-se greomp hor possubl evit o zoulaji.

Stat ar re a zo bevet a zo leun a drue,
Rac vit asten o bue, qement zo a vanc dê.
Privet demeus a abri, privet demeus a voued,
Truez eo sônjâl enne ; oll int dizesperet.

210

Darn anê a zo privet a dadou, a ramou,
 Darn a guerent, mignonet, eus o bugaligoù,
 Ha qement zo necesser d'an den evit beva
 A zo eno distrujet, n'o deus breman netra. (201)

Deomp - ni eo - ta, christenien, ni atao protejet
 Dre eur c'hraç bras a Loue, en hor brô beniguet,
 D'en em hasta da zicour hor breudeur maleürus :
 Ze eo ar qiella moyen da blizout da Jesus.

Ebars en oll ilisou a Franç e zeus lennet
 Eus abers an eskibien eun detaiñ trist meurbet
 Var sujet ar C'hrêñ-Douar, evit pedi peb den
 Da zont da rèi e offranç, herves m'ê e voyen.

Hon Autrou Escop ive a bed, en e lizer,
 Dont buay da zoulaji an dud zo er vizer;
 Hor pastoret o deveus a galon vad qestet
 Evit sicour victimou ar maleur êruet.

Ar Vretonet, a surer, zo bepret jenerus,
 Pa zeo ret dont da zicour dre oll tud maleürus;
 Rac - se ec'h eller credi ne vo get ancouët
 Euy aluzen zo qen caer hac a quer brasset.

Gourcoude, ma vez eure privet eus ar boneur
 Da vea ellet donet da zicour ar maleur, (202)
 N'o devo qen nemet mont da gavet o ferson,
 A recevo qant joa vras o offranç a galon.

N'en deo get somman goal vras a glasqer ouz peb den;
 Ellout 'rêr contribui, mes herves ar voyen :
 Liardic an ezomec a zo douç da Jesus,
 Ret evit soulaji christenien maleürus.

Etouez nombr bras a vercou demeure a Largentez,
 Ne citimp nemet hini Hospital Montroulez,
 Pini a ellomp credi a vo certen meulet
 Qant qement a voar prizout euy hevelep mad-grêt.

Pa deu 'r superiolez da rèi anaoudeqez

D'an dud eus an hospital gant teneridiguez
 Eus an effejou horribl grêt gant ar C'hrên-Douar,
 An dud paour, côs ha yaouanc, a vouele gant glac'har.

Grêt o deus ar sacrific eus arc'hant o butun,
 Eus a bini n'em brivint enpad meur a zizun,
 Evit cavout ar bonneur, herves o oll bouvoar,
 Pa zicour ar victimou demeus ar C'hrên-Douar.

(203) Eun drese-douç voa clêvet an oll vugaliqui,
 O saillat endro d'ar Vam, hac int oll en daelou:
 « Deit, hor Mam, ni ho suppli, hon nebeudic arc'hant;
 » Biscoas ne rejomp dispign d'hon reata ger contant.»

Goude eur c'hen-vad-ober, pebes tranquilité
 A zant peb christen fidel er fonz eus e ene!
 Doue, leun a vadelez, en devo sonj bepret
 Demeus peb action vad grêt herves e speret.

A. Lédan.

(Vol. VII, p. 194-203.)
 strophes non numérotées.